

Meliad (François Le May : Gwiskri 1852 – Sant-Inan-Klegereg 1916)

Taolenn

Lilienn

Pardon santez Barban

Lilienn

Ton : Evnig a gan...

« Lilienn goant, lavar din-me :
Perag da-unan d'ar hreiste',
Pa verv an heol 'uz d'ar parkou
Ken a stou penn ar bokedou ?...

Perag, lavar din, lilienn,
E weler da gurunenn wenn
O sevel eeun e-bar an êr,
Daoust d'an arnev ha d'an tommder ? »

« Abaoe ar mintin em halis¹,
E kousk, setu, eul lommig gliz,
Lommig leun a freskadurez
Ha va hreñva 'eneb d'ar wrez. »

Plah yaouank, koanta lilienn,
Mar de' da dal glan ha laouen,
Soñj mad : kement-se 'zo dleet
D'az kalon bur, d'az tinamded.

¹ em halis : em halir.

Pardon santez Barban

I

Ne gan ket c'hoaz ar hog ha n'e' goulou de',
Kloh braz santez Barban a vrall war ar mene' ;
Lared a ra sklinton d'an dud dibun tostaad,
Pa barz 'n overn gentañ n'erruint ket avad.

Hiriv ema pardon patronez ar Faoued ;
Euz a-bell hag a-dost e teuer d'he gweled
En he chapel mein-daill e reier Mareg-Bran,
Eur burzud a chapel mar zo² dre Vreiz unan.

Skoachet e pleg eur roh doh kostez ar menez
Ha kuzet en deliou evel eun evn-gouez,
Noz-deiz ar ster Ele a gas bourbouill he dour
Beteg hi³ doh ar stank, 'vel eur ganaouenn flour.

En diabarz 'weler war gwer ha mogeriou
Buhez ar verzerez koulz hag he burzudou ;
N'eus ket eul leh kaerrou na dreist-oll gwell choazet
Da neb a gar pedi pell euz trubuill ar bed.

Mez d'an devez gouel-mañ, euz n'ouzon ped parrez,
Eur bobl tud a zered d'enori ar zantez ;
Leun e' an diou viñs vein, leun e' pont Sant-Mikêl,
Leun e' an oll hentchou a vleign d'ar chapel.

Peb eur, 'hed ar mintin, eun overn 'vez laret ;
Ar bobl a gresk dalhmad beteg an overn-bred,
An engroez a zo stank azaleg beg al lann,
Ken stank ma verv an dud e-giz eun taol-gwenan.

« Ola ! fablizien gêz, Per ar Park, Gweillemod,
Kozpereg, Kemener, Gov, Ar Wern ha Mhod,
Dibill ! eme Stanis ; kemerom beb a blad ;
Savari a wrezo niver a brofou mad. »

Hag, e-pad e poaniont⁴ kloer ha beleien
Da gana an overn euz oll nerz o horzenn,
Ar seiz ozah kaloneg, a-dreuz ar bobl fidel,
A zerr eun eost arhant en-dro d'al leh santel.

Na piou 'vo estonet ?... Soñj ho-peus oll, me 'gred,
Pegement an arnev 'hed an hañv 'n-oa trouzet :
Gand aon euz ar gurun, gand aon euz an tangwall
E-leiz o-doa pedet ar zantez d'o diwall.

² mar zo : ma'z eus.

³ Beteg hi : beteg anezi.

⁴ poaniont fazi yezadur ; e poagn kloer ha beleien.

II

A ! tud vad Breiz-Izel, dirag santez Barban
Na pedennou a feiz a skuillit en deiz-mañ !...
Na piou 'laro ivez pegement a hrasou
A ray Doue dezi evid hoh ezommou ?

Setu an añjeluz o son d'an taol kreiste'
Hag ar bardonerien 'n em strev dre ar mene' ;
Lod dindan al liñser⁵ a ya da glask merenn,
Lod d'ar hêriou tosta, lod all war ar hlazenn.

An heol tomm, dreist al lann, a hoarz 'barz an oabl glaz,
Al levenez a luh war zremm vihan ha braz.
E pep korn an dachenn, o !, na savar joauz !
Evid yaouank ha koz, o ! na devez eüruz !

Kredi 'rafeh a-bell kleved kruz ar mor leun
Pa vez gand an tourmant dilusket tre d'an deun,
Pa hourdrouz an avel o tremen eur hoad don
E-mesk an dero koz, ar histin hag an onn.

A-dost 'zo⁶ eun tourni gand fleitou, trompillou
Gwerzet d'ar vugale gand mistri ar staliou ;
Ar re-mañ ne ehanont da hopal a-bouez-penn,
Treh d'an everien jistr e-tal ar varrikenn.

An oll baotred ampart en em laz o sached
Euz ar hloh lardet deh gand mein glaz bruzunet ;
Ne dalv ket da zoudard, n'e' nemed eun den flak
Neb n'e' ket gouest gantañ d'ober daou daol distag.

Eun tolp merhed fichet, fleurenn ar yaouankiz,
A ra eur balead 'vid diskouez o hoantiz,
A-raog mond d'an disheol da gomz kaer ha seven,
Pe da stlapa spillou e toull-tro ar feunteun.

Ar beorien o-unan, gouliet, mahagnet
Eur poulzad a ankoua o foaniou diremed ;
Kana 'reont kantikou pe gwerzennou santel,
Hag gwennegou a gouez a bep tu 'n o skudell.

N'eus 'med tud diramagn, moarvad a Gêr-Wazi,
Arouezet war o dremm muzul o zotoni,
Ar re-ze a vouse'hoarz, a gav simpl ar feson
Or-beus-ni d'enori e Breiz or zant patron.

III

Lezom aneze⁷ d'ober fae war on zempladurez

⁵ al liñser : an deltenn.

⁶ 'zo : ez eus

Ha distroom buan dirag or patronez :
Tregern 'ra an draonienn gand an taboulinou
O hervel d'an iliz evid ar gousperou !

Ar bobl en em vod c'hoaz, evel d'an overn-bred,
Er-mêz ha diabarz d'ar chapel benniget
Hag an oll a asped gand fiziañs ar zantez
Da daol war bep hini eur zell a drugarez.

War ziouskoaz paotred vad, en eur prosesion,
Bremañ 'vo douget skeudenn goant an Itron
E-mesk kroaziou arhant, bannielou alaouret
A ra lufr d'ar goueliou e parrez ar Faoued.

Ar han hag ar muzik an eil goud' egile
En em respont er stank tro-war-dro d'ar mene',
Hag an oll o kleved eur sort meulodi⁸
A heuill santez Barban gand ar brasa dudi.

Heuill a reont ar zantez evid kaoud he bennoz
A yey gante d'ar gêr a-raog ma vo serr-noz,
A gasent d'o herent ma vo an tiegez
Diwallet a zarvoud e-pad oll ar bloavez.

Echuet ar pardon, ar hloh a vrall bepred,
Mez trist e son bremañ : selaouit hañ 'lared :
« Chañs vad ha kenavo d'ar gristenien wirion
A zo bet er menez 'pedi santez Barban ! »

Notenn gand an oberour :
Er Faoued hag er parrezioù tro-war-dro, santez Barban 'zo anvet santez Barbon.

⁷ Lezom aneze : Lezomp-te-e, er skrid orin.

⁸ eur sort meulodi : eun isort melodi, er skrid orin.